

Itron Varia ar Merzer.

Itron Varia ar merzer me meus amzer kollet
a derempred eur fumelen a ioa fur a parfet

ia ma dije bed madou evel ma teuo a gened
me a ia breman da embarki var ar mor a dri ga de.
evid kerc'hed d'am mestrez eun habid Satin gwen.
evid diskoëz d'am broïs e meus bed eur plac'h brao.

ag eur plac'h ge a joius evid ma deus madaou.

— me o suppli va fried nem dest ked var ar mor
ho lestr a zo bihanig ar mor a zo trei'tour
ho lestr a zo bihanig ag ar mor a zo bras
na ma na verc'h c'houi beuzet petra rafen sivoas !

me zo eur vinorez iaouank na meus na mam na tad
me zo eur vinorezik iaouank e komanç dond er bed
a zo digasset aman ne anavezan den e bed.

Skrivet eo al lizeri partout dre ar c'heriou
Beuzet eo ar marc'hadour eun daou pe tri mis zo.
Daoust petra lavaro n'intanvez ar c'helou pa c'hlevo !

eun dervez goude koan pa voa deuet an noz
Pa voan me ed em goele evid kemer va repos
tri dollik var ar prenestr a zo skoët en noz,
Pa voan me ed em goële evid kemer va repos.
— Piou zo aze breman d'ar poent man deus an noz ?
— Savit intanvez iaouank da reço eur presant
Da reço kalon o pried en eur c'hassed arc'hant.

A me sevel ac'hane a komans da voëlla
Otrou Doue va fried pelech e moc'h breman ?
Marteze c'houi zo maro pem kant leo deus va zi
tolled o c'hez kernigou d'ar pesket da zrebi.

tavid intanvez iaouank tavid na voëlet ked.
me a zo eur c'hloareg iaouank o pezo ma keret

— Birviken na zemezan na(1) ne komeran par,
a Breman pa ze maro va vriedig irvoan.

Neb a velche an intanvez o c'hantren en illis
e kreïñ etre daou Kapuçin hag hi gwisket e gris.

Neb a velche an intanvez o c'hantren en e c'hramb
e kreïñ en tre daou Kapuçin hag eur gloarek iaouank

neb a velje an intanvez var paveo Rouan,
en e zreïd eur boutou lejer ag eur bazou stam du
an daelou deuz e daou lagad e c'harozi ar ru.

An intanvez man lavare eun devez goude koan
me garche beza er barados en eur plassik bian.
e kreïñ etre va daou vugel a va vriet irvoan
e non neuze me kanche gant an ellez eurus
Gloria in excelsis te deum laudamus.

Jannton Puil, 16 juin 1851.

Penguern indique à peine la séparation des strophes.

(1) Ms : ma ; la correction -na- est de moi.